

Taog (Plouigno, 1852 – Montroulez, 1911), ha **Merer** (Lokireg, 1843 – Montroulez, 1890)

Gwerz truezuz. Eur skrid e galleg a zo da heul an hini brezoneg, mez n'eo ket just ar memez skrid.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Eur bern geriou galleg brezonekaet a zo. Red eo gouzoud galleg evid kompren.

Gwerz truezuz war sujed eur bugel yaouank a zo bet tri bloaz dindan ar Pazennou¹ 1881

War eun ton trist

Bretoned a Vreiz-Izel, tostait da gleved
Resita en gwirionez ar pezh 'zo erruet.
An oll a deuy da grena o kleved kement-mañ,
Mar gellan kondui va fluenn evid hen disklêria.

Kalz a draou 'vez disklêriet a-berz ar journaliou.
Aliez 'rent² gwirionez hag aliez rent gaou,
Mez ar pezh a zisklêrian a zo re wir siwaz,
Dizoloet e' ar hrim en miz Mae 'vid ar bloaz³.

En eskopti euz Rozaon, tostig da gêr Vitré,
An eur barrezig vihan he ano sant M'Herve
'Oa eur famill tud fall gand an diaoul posedet.
Mez evid o rekoñpañs ez int bet oll barnet.

Ar verh deuz an ti-ze, eur plah yaouank kollet
Gand eur hemener yaouank a zo bet debochet.
A-benn eur pennad goude, eur bugel he-deus bet
En ti eun amiegez 'barz ar gêr a Vitré.

An amiegez o kleved he-devoa brudou fall
He dalhas 'barz en he zi 'vid doned d'he diwall.
Neuze ar bugel a zo kaset d'eur vagerez
'Vid na vije ket brudet en e amezeg.

En-pad eiz vloaz ar bugel a zo bet o vaga
Heb beza bet e vamm eur wech o weled anezañ.
Ar hemener a bae ar mizou magerez
Beteg ma 'nevoa klevet 'oa maro e vugel kêz.

¹ ar pazennou ; ?

² rent : e lavaront. (deuz ar galleg).

³ miz Mae 'vid ar bloaz : miz Mae ar bloaz-mañ.

Ar bugel a oa savet, eur bugel dilikad ;
Nemed ma ne anaveze, allaz, na mamm na tad
Rag en-pad eiz vloaz e' bet en ti e vagerez
Heb beza bet biskoaz oute neb seurt anaoudegez.

Komprenit bremañ, kristenien, petra o-deveus greet
An dud kruel ha mechant, gwaz evid tiranted.
Petra o-deus iñvantet ober d'ar bugel kêz
Pa zoñjan en dra-mañ on leun a dristidigez.

Ar vourevien a deu da gondao⁴ d'ar maro
O foaniou buan a base ne vent⁵ ket ker garo
'Vel m'e' bet an inosant-mañ gand e dud kondaonet
Da chom 'pad tri bloaz heb fichal 'n eun toull en sekred.

Eur voest o-deus preparet da lakaad anezañ,
Leun a doullou, 'barz er harr, evid rei êr dezañ.
Mez dirag ar vagerez 'deus ket kredet ober.
Mez pa'z int deut war an hent o-deus greet o afer.

En eur antren 'barz en ti o-deveus bet tennet
Ar bugel paour deuz ar hrouf hag o-deus hen lakaet
E-barz er forn eur pennad gante e' bet pozet
Evid ma ne vije ket o hrim dizoloet.

Eiz devez e-barz er forn e-neveus paseet,
Mez neuze o-deus soñjet an tri den milliget
'Vije bet klevet e vouez gand tud o paseal,
Pez a lakaas aneze da cheñch plas dezañ raktal.

Eur havell bihan er hao o-deveus bet pozet
Hag eun dornad plouz ed-du ennañ o-deus lakaet
Gand eur goz roched d'e dad-koz ar bugel 'zo paket
Ha da vond e-barz an toull-ze raktal e' kondaonet.

O ! c'hwi, tadou ha mammou, selaouit kement-mañ.
C'hwi ispisial, tud tener a deuio da ouela,
O weled peger kriz e' eur vamm en andred he bugel.
Gwelloh 'vije bet dezi rei dezañ eun taol marvel.

En-pad eur miz ha tregont e' bet ar bugel-ze`
O soufr eur verzerenti ar vrasa en toull-ze
Heb beza greet netra gand an amezeien,

⁴ da gondao : da gaondaoni.

⁵ ne vent : ne vezont.

'N-eus ranket ar bugel paour soufr kalz a yenienn.

Peder batatezenn bemdez e-neus evid boued,
Ha dour ha gwinegr da eva p'en-divije sehed,
Ha ma 'dije ar maleur da glemm, 'vije lavaret dezañ
'Vije lakaet en eun toull en douar da vreina.

Tri honhan⁶ 'n-eus paseet ar bugel en toull-ze
Hag e vamm en e gichenn kousket en eur gwele
Heb na gemere⁷ ar plah-mañ truez deuz he bugel.
Kollet 'oa gand an droug-spered ar vechantez⁸ kruel.

Mez ar mab demeuz an ti a deuas da gleñvel
Hag a-berz eur pennad goude a deuas da vervel.
Diou deuz an amezeien⁹ a deuas da veilla
Ar horv 'oa war ar varv-skaon evid an noz kenta.

Hag int 'benn eur pennadig hag o kleved eur vouez
Evel eur glemmadenn, ne ouient deuz peleh,
Hag int hag o lavared raktal an eil d'eben :
An hini maro a remui ha koulskoude e' eet yen.

Mez allaz an eil nozvez e klevent ar memez tra.
Neuze 'deus anavezet mouez eur bugel er wech-mañ.
Raktal o-deveus soñjet e oa an dud fall-ze
O-devoa kleñket o bugel en eun tu a-goste'.

Raktal ez eont d'ar gêr evid lared d'o zad
Ha da rei anaoudegez deuz ar hrim efroyabl.
O zad, pa 'nevoa klevet, d'ar mêr 'n-eus lavaret
Penaoz e oa en ti-mañ eur hrim dizoloet.

Pa deuas tud an ti-mañ deuz an interamant
E oant chomet toud karget euz a estonamant
O weled an archerien oh ober faksion
Da hortoz an dud-mañ da renta de' rezon.

An archerien a houlenn deuz ar plah yaouank-mañ

⁶ Tri honhan :? Marteze "tri hont hañv", tri hañvez.

⁷ na gemere : heb na gemerfe.

⁸ ar plah vechant, droug.

⁹ an amezeien : an amezegezed.

Peleh e oa he bugel oajet a unneg vloaz.
Hag ar plah maleuruz-mañ a respontas deze
Penaoz e oa o vaga en eun ti war ar mêz.

An archerien a respont : « C’hwi a lavar gevier.
Ho pugel a zo amañ pell a zo en mizer.
Digorit deom an toull-mañ evid ma vo gwelet
Hag-eñ n’ema ket amañ ar hristen ‘peut¹⁰ ganet. »

Mez an archerien kerkent ‘vel m’o-deus digoret
O-femp e kouezent en kazi ‘vel semplet.
Eur pennad mad ez int bet heb galloud kaozeal
P’o-deus gwelet ar bugel en eur stad ken barbar.

Mez neuze e’ bet tennet ar bugel ahane.
‘Barz eur stad an drista a oufed da weled,
Hag ar re-mañ a zo bet war an eur garotet
‘Vid ma vijent da Vitré o-zri raktal kaset.

Ar bugel ‘zo bet kaset ‘barz en amezegez.
Evel eur prosesion e teu tud di bemdez
Evid gweled anezañ hag ar plas leh ma oa,
E tered an dud bemdez evid her bizita.

Demeuz ar gêr a Vitré, deuz ar gêr a Roazon
E tered an dud bemdez ‘vel eur prosesion.
Deuz ar gêr a Zant-Brieg, deuz ar gêr Bariz,
A zo bet eur bobl imañs o weled ar suplis.

D’an drizeg euz a viz Eost unan ha pevar-ugent
Ez int bet apariset dirag ar varnerien
Er hourdasis¹¹ en Roazon ez int bet kondaonet
D’ar poaniou a welot amañ war-lerh raportet.

Deuz adaleg an tribunal ha beteg ar prizon
E oa ouspenn tri-mil den war ruiou Roazon
Evid gweled an tri-mañ o voned da juji
‘Tre daouarn an archerien, an dud-se ken iñpi.

Da nav eur demeuz an noz ez e’ bet pronoñset
An are euz o setañs gand ar Juri greet.

¹⁰ ‘peut : ho-peus

¹¹ Er hourdasis : galleg “cour d’assises”

An tad-koz da zaouzeg vloaz deuz a rekluzion,
E wreg en-pad he buhez kondaonet d'ar prizon.

Hag ar vamm ken dinatur he-deus bet ugent vloaz
Evid he funision, rag meritet he-doa.
Gwelloh e vije bet dezi mond bemdez da glask boued
'Vid merzeria he bugel pini¹² 'devoa ganet.

O ! c'hwi, tadou ha mammou, karit ho pugale.
N'eh it ket d'o gwalldreti, grit atao vad deze,
Evid goude ho maro beza rekompañset
Gand Jezuz en e hloar en palez an Dreinded.

An hini e-neveus greet ar resit a-nevez
Na war ar vezerenti demeuz ar bugel-ze
A oa 'barz en kêr Roazon pa e' bet an afer
Hag e-neveus her rimet pa 'n em gavet er gêr.

E ano 'vel m'her gouzoh n'e' ket dizanvet
Rag me a gred e partoud dre ar vro oll-vrudet.
Eur baleour dre ar vro, Yann an Taog e ano
A zouet deoh ar Baradoz goude eur ar maro.

¹² pini : pehini ; an hini.